

RECIT COMPOSET A NEVEZ

Voar sujet un Exempl a so o ren er Rivier
ar Poulosquet.

Voar ton an *Usullier*.

953

BRETONNET, me ho suppli, tostaat da glevet
Eur recit deus un exempl dre gals a dud prouvet;
Voar rivier ar Poulosquet, e stang ar Pont neve,
Hac en deus epouvantet ar vro hac ar c'hontre.

Ispluca a rin dirazoc'h an nombr ar paroujou
Pere so bet estonet o clevet e vouezyou,
Pleuyel hac ar Vihini, Langoad ha Kempervan,
Cambleis, Rospars, Lanvilin, Trezeni ha Trevan.

Noblanç a guer Lannion, en Cariolenno
Bour'higen ker Landregner hac an dud tro var zro,
Int bet en em assinet da vonnet d'e glevet;
Quent ma teuont ac'hane, e zint oll spouronet.

An dud eus ar paroujou pere am eus anvet,
A ra goude o c'hoagniou, e vanden d'e guellet,
Ar re a vo bet hirio ne zuint quet varc'hoas,
Ober a ra impouvant d'an oll, bian ha bras.

Darn a lavar e un den oc'h ober piñgen,
Ha darn-all, ous e glevet, a lavar e eul loen:
Mar de un den e rencq soufr cals a boan ha dourmant;
A mar de eul loen e rencq bea loen divorant.

Pa gri e clever e voez evel en ur voten,
Quen a laca da zével bleo an dud en o ven:
Ranfermet ha goloët en un dévaligen,
Quement a ve condaounet dar poagniou a rencq clem:

Me deu d'e comparachi ous un den destumet
Er basse-foz evit souffr ur binigen galet:

Quarnet, minotezet, e guis eur c'hriminal,
O c'hortos beza lamet cren divoar an douar.

En eur ober pempzec de, a zo bet dec mil den
O visita ar stang-man, sillaouet christennien,

Hep caoet an assurance da allout lavaret
Dirac den ar guirionez, petra o deus clewet.

Bet so beleïen savant, tud disquet ar c'haëra,
O clasq gout dious e scrijou petra eo an dra-ma,
Hep no deus gouyet metra ar re a vouie muia,
Quement a voar an azen hac an den savanta.

Gnir eo so tapet enni daou lapouç estranjour,
Groët o habitation gante er fonç an dour.
Dre an drous eus an dennou e tenont da zével,
Hac evel ma int guelet, ho deus renquet mervel.

En noz diarog eur foar, e c'hano foar, Langoat,
Daou ze arog ar yaou Basq, evit isplia mat,
Eo tapet an divea hac en devoa a hed
En e gorf pevar zroatad, hac unan en e veg.

Joa a oa er calon an tud, o partial d'ar guer,
Guelet a ret, emeze, petra oa ar c'hrier,
Ar merc'her, gonde cuz eol, e crias adare
Quen a jonch dan dud e cren an douar dindanne.

Quement a glev an dra-mâ en deveus lavaret
Penos e dleffe beza ar stang-man disec'het.
Sillaouet, assistantet, hac e clefet breman
Petra a ampeich ar bobl da zont d'e disec'han.

Pa ve'n dud en eur c'hostez en c'hlevont dindanne,
Hac ar re e ve en tu-al a lavar evelte,
Hac ar re a ve en daon ben a lavar memes tra;
Petra a dalse neuse donet d'o disec'ha ?

Eul labour gonsiderabl a renquer da ober,
Ha c'hoas goude ma ve groët, a ve eollet an amser;
En defot na eller gout ar plaç hac an andret,
Evit toulla vouarnezan da essa e velet.

Quement den a tremeno dre pont ar Poulosquet,
Hac en devo volonteiz da vonet da glevet,
Disquennet da vord ar stang, ha quent dont ac'hane,
E contanto e speret hac e curioite.

A ya ar bobl en antier da gommanç lavaret
N'en deo quet curiosite monet quen d'e glevet,
E ze guel pedi Doue a galon evitan,

Ma pligeo gant va Jesus douet d'en dilivran.

Pedomp an Autrou Doue ma veomp preservet ,
 Hac an Autrou Sant Hubert, mæstr an oll serpantet ,
 Ha pedomp , qu'en finissa , evit an anaon ,
 Mar d'e , ma vo dilivret buan deus e brison.

CHANSON COMPOSET A NEVEZ

Voar sujet eur Soudard hac e Vestres.

Var un Ton Nevez.

ME a fell din implija darn eus va santimant
 Da gompos eur canouen entre daou den yaouancq
 Hac en em daremprede gant enor ha resped ;
 Pa oant en o brassa joa int bet dispartied.

O daou o deus promettet dre guir fidelite ,
 O dige gret ur c'hontrad bete fin o bue ,
 Hac an deiz ma dlient bea etabliset ,
 E zo arruet an urz da denna ar billet.

Digoet eo bet gant ar goas partial d'an arme ,
 Ar plac'h a renq chom er guer da souffr extremite ,
 Poan ha chagrin ha tourmant ha desolation ,
 Da rencout dispartia eus e brassa mignon.

Ar Sul tosta ma parti e za an den yaouancq
 Deus ar guer, goude e leing, da gaout e vestres couant ;
 Tristoc'h evit ar maro , e ya de saludi ,
 Goude obe promesse , rancout dont de zerri.

Salut d'ec'h eur veach c'hoas , va mestrizic fidel ,
 Me carre en ho c'hichen gallout dont da vervel ,
 Evit ma c'halfac'h goelet va oll avanturio ;
 Ranna a raï va c'halon , pa quitain va bro.

En han' Doue , emezi , na songit d'an dra-ze ,
 Rac un enor e zo doc'h servicha ar Roue :
 Ma vec'h eur Soudart vaillant , emezi , ma mignon ,
 Da dont d'ar gner offraget ho pe eur bansion.

O clevet ho preposou e c'hasten ma bue ,
 Pa finisso ma amser em bezo va c'honge ,

Hac e tenin c'hoas d'am bro, e toez ma mignonnet,
Mar de laret gant Doue e veamp unisset.

Bevet digent, va mignon, ha partiet contant,
Pedet Doue d'ho sicour, ha credet fermamant
Riquen ne vemp separet nemed gand ar maro;
Ennez a ra fiussa an oll bromeseo.

Gouir a laret ma mestres, n'en deus quet c'hoas eiz de
Em eus guelet eur breuven dimeus a guemen-se;
Brassa camarad em boa a so ed en douar,
Hac e ma mignonnet oll dean en glac'har.

Grit un tam reflexion voar ar pez a velet,
N'y n'en deo quet ar maro en deus hon separet,
Mar bec'h fidel, ec'h ellomp derc'hel an amitie,
Ha c'hoas tremen assambles ar rest eus hon bue.

Trist a deplorabl e voa clevet an daou den-mà,
Pa tosta da bardae, o tont quimiada

An eil dious eguile, quent bea separet,
Bete gout no dige quet ar c'hraç d'en em velet:

» Pa zellàn ous an eol e za trist va c'halon,
Evel un den e deve ur goel goll diræson,
O rencout dont da guitât va c'harantez parfet,
Ma esperanç er bed-màn, ha va oll jouausdet »

» Ha ma speret, emezi, a so pareillamant:
N'en deus den evit compren pegueument a dourmant
Em eus souffret aboe hoc'h eus bet ar billet,
Beteç an de ma tleomp bea dispartiet. »

» Douguen a red ar voalen dimeus hon promesse,
Me ho ped da rei din merq eus ho carante:
Eur mouchovar, ma allin sec'ha ma daelo,
Entre ma choimin er guet hac o quitaad va bro. »

» Just e ve, ma servicher, quemeret va alc'houe:
Bea em eus en abondanç, a drugare Doue;
Choasit unan anezi ha e vo do d'ho souet,
Me a zongo ar voalen epad ma vin er bed. FIN.